

374

Pennerez Keroulas.

Canaouen gôs, grêt vandro ar bloavez 1565...

(30)

Ar Bennerez a Keroulas
N'hac e deus ur blijadur vras
Da zoug' ur zae a satin glas
Pa ra gant Autrounes dansã.

Evelse e comzet er zal,
Pa zese ar Bennerez er bal;
Rac Marquis Meyl voa erruet
Gant e vam hac un haul bras meurbet.

Me garje beza goulmic glas,
Var an doer a Keroulas,
Evit clêvet ar c'homplici
Entre e vam ha va hini!

Me a gren gant ar pez a velan;
Neo get hep sonch int deut amân (31)
Deus a Guerne, pa zo en tij
Ur Bennerez da zemezi.

Gant he maidou hac he hano brudet,
Ar Marquis-se dir na blich get;
Mes Kerthomas, deus a bell zo,
A garân, a garin ato.

Encrezet voa ive Kerthomas,
Gant an dud-se deut da Keroulas;
Rac en a gare ar Bennerez,
hac a lavare alies:

Me a garje beza crag-houad,

Var al lenn e voalc'her e dillat,
Evit glebia va dcoulagast
Gant an dour demeus e dillat.

Ar Bennerez a lavare
D'he Mam-itron bars en deiz-se: (32)
Me vel êru Marquis Meyl amã,
A laq va c'halon da ranna.

Va Mam itron ha me ho ped,
D'ar Marquis Meyl n'am roit get:
Va roit qentoc'h da Benn-ar-Run,
Pe, mar qirit, da Salain.

Va roit qentoc'h da Kerthomas;
Ennes en deus ar muia graq;
En tij-mã e teu alies,
En a lezec'h d'ober din al lez.

En Castel-Gall me a zo bet,
Mad en Doue ne meus quelet,
Nemet ur gos sal moguedet,
hac ar prenestou anter-torret.

En Kerthomas me a zo bet;
Madou avialc'h a meus quelet; (33)
An dorjoz zo 'n arc'hant quenn,
Ar prenestou zo en dour melen.

Va merc'h, ancouait an oll ze,
Tra qent ho mad na dal gant me.

Roet ar guerion : an dra zo grêt,
D'ar Marquis Mezl e riot demerzet.

Ur voalen aour hac ur sinet
Gant Kerthomas a voe din roet ;
O c'hemeris en ur gana,
hoc o restaulin en ur vouela .

Ar Marquis Mezl, ho coalen aour,
ho sinet gant carcaniou aour ;
Na ven get lezet d'ho gemeret ;
Miret ho re ne dleân get .

(34) Cris vije ar galon na vouelje,
En Keroulas neb a vije,
O velet ar Bennerez qez,
O potat d'an nor, pa ye ermès .

Adieu, ty bras a Keroulas !
Birriqen ennoc'h na rin pas
Adieu, va amezeyen quès !
Adieu bremâ ha da james !...

Peorien ar barros a voele,
Ar Bennerez o c'honsole :
Tavit, peorien ; na voelit get :
Da Gastel-Gall deut d'am guelit .

Me royo aluzen bemde,
Teir quech ar zuy ar charité .
Trivac'h palevarz a vouinis,
Hac hey ha qerc'h en ho tivis .

(35) Ar Marquis Mezl a lavare
D'e vraz nevez, pa e c'hlevre :
Evit bemderz na roet get,
Rac va madou na badfe get .

« Marquis Mezl, hep caret ho re,
» Me royo aluzen bemde ;
» Evit dastumi pedennou,
» Goude hor maro, d'hoj eneu . »

Ar Bennerez a c'houlenne,
En Castel-Gall pa errue :
« Ha na gafet get ur messenger
» Da gass d'am Mam-me ul lizer ? »

Ur Pach yaouanc a respontas
D'ar Bennerez, pa e c'hlevas :
« Scriptit lizeriou pa querfet,
» Messengerien a vo caret . »

(36) Ractal ul lizer a scrifas,
Ha d'ar Pach qerqent en roas,
Gant gourc'hemen evit e gass
Diouc'h-tu d'he Mam da Keroulas .

P'erruas al lizer ganti,
E voa er zal oc'h abati
Gant lod an Noblanç eus ar vro ;
Kerthomas voa ive eno .

P'e devoe al lizer lennet,
Da Kerthomas e deus lavaret :
Lagit dibra qezec affo ;
Da Gastel-Gall e zân hirio .

Itroñ Keroulas a c'houlenne,
E Castel-Gall pa errue :
Patra nevez zo en ty-mân,
Ma zeo stignet ar perzier er quis-mân ?

(37) Ar Bennerez a voa deut amân,
A zo decadet en nôs-mân .
— « Mar deo maro ar Bennerez,
» Ah ! me zo he güir lazerez .

» Meur' vech e doa din lavaret
» D'ar Marquis Mezl n'he rojen get ;
» He rey qentoc'h da Kerthomas,
» P'imi en doa ar muia graç . [2]

fin .

(Vol. IV, p. 30 - 37.)
29 str. numérotées)